

— 4 —

Biskoas, eme Sant-Bernard, biskoas ne oue clevet :
 Eur goulen gret da Vari a vet bat refuset :
 Ar verc'hez a zo hirio ker galloudec'h i dec'h,
 Hag en despet d'an amzer ne ket berre et he brec'h.

Ar Verc'hez dinam a Lourd e menez Pyrene,
 A ziskouez he zrogarez de viracloc'h bemde ;
 Ar miracloc'h a velomp e Lourd er Pyrene
 Petra viro n'ho guetimp e Lann-Riot ive ?

Evel ar bardonerien a ia leun a fisians
 Da glask buez hac iec'hed dar c'horn-se euz ar frans,
 Ni a zui d'hor chapelic gant eur fisians neve,
 Da laret hon oll bouaniou a gorf bag a ene.

A vechou eur medesin kier vo fisiout en han,
 Ne allo gant he skiant hog zicour pa vimp elan ;
 Eun hor poaniou, chrestien, ni n'enj hen amprouet,
 Itron Varia Lann-Riot h'or soutajo' bepred.

Pet soudart da Lann-Riot, kent PARTIAL GOUESTLET
 Zo bet, bennoz da Vari, er brezel diouallet !
 E creiz danjeriou ar bed, pet e deuz conservet !
 Bursudou a vadelez heb niver e deuz gret.

Pebez avantach eta evidomp, Molanis,
 Hon deuz oll en em glevet da zevel eun ilis
 En honor da vam Jesus rouanez an elet
 Prest kaer ato d'hor sicoor kerkent ma vo pedet.

Iron-Varia Lann-Riot, refuj ar bec'herien,
 Taulit eur zel a droez var ar bardonerien,
 A re a zo deut h'rio, ar re a zeui goude,
 Ma'zaint d'an env a'ho meuli hei an eternite.

CANTIC ITRON-VARIA LANN-RIOT

Ton : *Ni hod salud stereden vor.*

DISKAN.

Henor da Verc'hez Lann-Riot,
 A zo sicour ar martolot,
 Esperens ar mamou christen,
 Ha souten al labourerien.

E Moëlan, e ribl ar mor,
 Eur chapelic a zo digor,
 Hag enn hi Guerc'hez Lann-Riot,
 Mari guir vam ar martolot.

O Mari, pa c'houezo an ael,
 Hema zonjo en ho chapel !
 Euz ho chapel, mirit bepred,
 He lestric p'our na ve flasiret !

E Lann-Riot tel ar mesiou,
 E creiz ar guez hag ho bleuniou,
 Eur chapelic a bign en er,
 Evit nerza al labourer.

Ma skuiz hema gant he labour,
 O Mari, roit prim ho sikour,
 Ha pa bedo en ho chapel,
 Ra zanto ractal ho skoazel !

An ebettel, var ar mor glaz,
 Guechall iveau a besketas ;
 Mez pek ne deu en ho rouejou,
 Ken a goms Jesus en autrou.



O Mari, c'houi bedo Jesus,
Ma vo ouzomp trugarezus ;
Ha ma lâro vid-omp ar ger
A-ro chans vad d'ar peskete !

An oll her goar, ar c'hreunen ed
En douar goechou a ve collet :
Mez ma zeu Doue da barlant
E lec'h unan ve cavet cant.

C'houi c'houlenno, Guerc'hes Vari,
Ma brosio hor parkou ni,
M'hor bezo cant e lec'h unan,
Da nebeuta, digoll hor poan !

Ho mab Jesus en deuz prijet,
Gant ho lez pur, bezi maget ;
Peb mam iveau en ho chapel,
A gavo lez vit he bugel.

Penoz sonjal en ho Mabic
Ha dilezel ar bugelic,
A varvo sur, var he barlen
Ma na roit d'he vam he goulen.

Labourer douar, har martolot
A zeui a bell da Lann-Riot,
A ziredo evit pedi
A ziredo evit meuli.

Mez evidomp ni Molanis,
Mar hon eus savet hoc'h ilis,
Bezit moi c'hoas ar Verc'hez ker
Hon diouallo a bep danjer.

CANTIC ALL

Ton : Kelven
DISKAN

Santez Mari Mam Doue, patronez Lann Riot,
Clevit mouez al labourer, peden ar martolot ;
Pa skoisimp en hon labour, pa gienimp var ar mour
Sellit ouzomp à druez, roit d'eomp bepred sicour.

Hon tadou koz tud a feiz, tud a religion,
Var bord ar mor e Molan 'vit ho devotion,
Ho devoa eur chapelic lesbanvet Lann Riot ;
Lec'h ma pede calouneuc couer har martolot.

Eun amzer drist a zeuas, an dud vad oue chasseet :
Dre urs tud fall ha difeiz, ar chapel oue pilet ;
Mes d'hor Mam ato fidel, ni zeue dar plas santel
Dirag imach Lann Riot da c'houlen he skoazel.

Canomp brema, christeuien, canomp gant joausdet,
Canomp gloar ha meuleudi d'ar Verc'hez venniget ;
Chetu'savet a neve chapelic Lann Riot ;
Pebez consolation evit ar martolot !

Ma 'n em gavit var ar mor e danjer ho puez,
Galvit Mari gant fisians ; hi eo ho rouanez.
Lavarit a greiz calon ! O GUERC'HEZ LANN RIOT !
Ractal Mari zicouro ar paoukez martolot.

Mad evit an dud a vor, Mari zo mad d'an oll,
N'e deus nemet eon desir, ne zaio den da goll ;
Pa vec'h eta trubuillet, gan ar c'hlenvet goasket,
Pedit devot ar Verc'hez, sur e vec'h confortet.

An hini e deus maget hor Zalver gant he lez,
Evidoc'h, mamou christen, zo leon a vadelez,
Mar vank d'eoc'h magadorez 'vit souten ho pogel,
Deut gant ar brassa fisians da bedi d'he chapel.